

J. Gall

An Aotrou Keriolet

TRAGÉDIE E TEIR LODEN

LAKEAT E BREZONEG LEON

Gant an Aotr. LE GALL

Persoun ar Folgoal



BREST

MOULLEREZ AR C'HAZETENNOU KATOLIK

4 — RU AR C'HASTEL — 4

1905

18
891.
682
LEG

10746

An Aotrou Keriolet

881.
682

TRAGÉDIE E TEIR LODEN

LAKEAT E BREZONEG LEON

Gant an Aotr. LE GALL

Persoun ar Folgoat



BREST

MOULLEREZ AR C'HAZETENNOU KATOLIK

4 — RU AR C'HASTEL — 4

1905



HANOIOU

ar re o deuz perz er c'hoari-man

An Aotrou KERIOLET.

MATHURIN, mevel koz an Aotrou Keriolet.

FRANCÈS, mevel yaouank.

YVON, merer an Aotrou Keriolet.

PER, mab Yvon, fillor an Aotrou Keriolet.

IZAAK, ar sorcer.

LOIS, {
BIEL, { bugale.

Aotrou Kure Pluvigner;

YANN,

MICHEL,

JOB,

paotred yaouank euz ar c'harter.
Bugale all.

An Aotrou KERIOLET

KENTA LODEN

Al loden genta a zo tremenet etal kastel Kerlois, ti an Aotrou Keriolet, ar eiz a viz Guengolo 1635, deiz pardon Itron Varia a Drugarez.

PENNAD KENTA

MATHURIN, FRANCÈS

Mathurin azezet var eur skabel vein, a lavar he chapelet

FRANCÈS

Ac'hanta, Mathurin, n'oc'h ket eat d'ar pardon?

MATHURIN

Nan, Fanch, re ien eo deut da veza va c'halon
Evit mont da gana, da zansal d'ar festou,
Evel ma 'z ean guechall, pa oa ruz va chotou.

FRANCÈS

C'houi zo bet koulskoude, guechall, eur goall ganer,
Ne gavet ket ho par tro-var-dro er c'harter.

MATHURIN

Ia, ia, em iaouankiz 'm euz gouezet forz soniou
Mes breman ne ouzoun nemet va fedennou.

FRANCÈS

Ar beden a zo kaer d'ar re zo var an oad.

MATHURIN

Var teod ar re yaouank ne 'z euz netra ker mad
Hag eur c'hantik laouen en enor d'ar Verc'hez.
Allaz! hor c'hantikou kaer vel mouez an Elez,
Den, var dro Kerlois, ne gred mui ho laret
Rak aoun zo e kleffe an aotrou kounaret.

FRANCÈS

Mam an aotrou, guechall, en amzer ma veve
A blijje kalz d'ezhi klevet ar vugale
Bodet var al letoun, varlerc'h ar Gousperou
Aze, etal ar vezen, o kana kantikou.

MATHURIN

Mam an aotrou, Francès, hounnez oa eur zantez,
Ker mad evit an oll, ken dous, hag hi mestrez,
Ken devot pa bede, ma kredan heb douetanz
Ez eo eat var eün da gaout he rekompanz.

FRANCÈS

Piou a c'helfe kredi e deuz eun eal ker guen
Mäget gant karantez eun diaoul var he barlen !

MATHURIN

Eun diaoul, e guirionez ; mes he vam ker zantel,
A bed kement 'vithan, ma teui da veza El.

FRANCÈS

Mathurin, mar d'eo guir ar pezh a livirit
Me baeo kraon kelvez...

MATHURIN

O va Itron, pedit

Evit ho mab, a zo hanter gollet,
Pedit, euz bar an Env, evit Keriolet.
Guechall pa edo c'hoaz kraouadur bianig
Kousket en he gavel, ker koant hag eun elig,
Me, sioul hag azezet etal korn an oalet
He c'hleve alies da Zoue o laret :
« Setu aze va mab, diouallit anezhan,
Rak guelloc'h ve ganen ve ar maro ganthan
Eget ne ve taget gant ar pec'het marvel ».....
Eun dervez ez oa deut ganeomp da lavaret
Ar beden diouz an noz araog mont da gousket,
Hag e lakeaz va dorn en he dorn, ha, dousik,
Evel pa vije bet o komz ouz he mabik :
« Mathurin, emezhi, hag he mouez a grene,
Karit va bugelik, ha goulennit ouz Doue
Ar pezh a c'houlennan me va-unan bemdez.
Goulen petra, Itron ? Ma vo beleg eun dez. »
Hag aboue me lavar, bemnoz va chapelet
'Vit ma vezo beleg, eun deiz Keriolet.

FRANCÈS

Neuze oc'h euz labour gant ho chapeledou,
Rak me gred e kollit ha poan, ha pedennou.

MATHURIN

Marteze, marteze, rak piou c'hell lavaret
Ar pezh a zo kuzet en amzer da zonet.

FRANCÈS

Guir eo, ha koulsgoude, n'e ma ket c'hoaz em fenn
E klevin eun dervez he genta oferen.

MATHURIN

Aliez Doue n'euz great burzudou brasoc'h c'hoaz,
'Vit lakad ar pec'her da veza eur zant braz.

FRANCÈS

Ia, ia, mes deuz heman, n'oc'h ket deut c'hoaz a benn
Kerkoulz vefte guiska d'an diaoul eur zoudanen !

MATHURIN

Amzer, Francès, amzer, speret Keriolet
N'eo ket c'hoaz, marteze, ker fall ha ma kredet.

FRANCÈS

N'hell ket beza falloc'h !... He galon n'eo ket aour,
Gouzout ran ; koulsgoude, en euz evit ar paour
Eun tamig karantez.

MATHURIN

Ac'hanta,

FRANCÈS

Kant malloz

Siouaz ! glever ganthan deuz ar mintin d'an noz ;
An enor evithan a zo eat e ludu
He gounar hag he aour deuz lazet ar vertu....
Ar c'homzou louz a zao euz he galon d'he veg
Evel ma sao ar pri var c'horre ar feunteun
Pa vez skrabet ar fonz. He galon a zo leun
A bep seurt loustoni ; ha c'houi gred vo beleg
An hini a ra-goap ouz an dud hag ar zent
Hag ouz Doue ive pa her c'hav var he hent !
An hini ne gren mui, zoken rak ar gurun
Hag a denn en Envou ! rak n'euz aoun ouz nikun,
Aoun ebet ouz Satan, he vignon milliget.
He gleze gant ar goad, re aliez ruziet
Atao a zo en noaz evit en em zifen.

MATHURIN

Evit en em zifen ? Ouz piou en em zifen ?

FRANCÈS

Ouz Doue ; rak den all n'hell outhan enebi !

MATHURIN

Kaout a raio he vam hag ar Verc'hez Vari !

FRANCÈS

Ar Verc'hez ?

MATHURIN

Ar Verc'hez hag he mam benniget,
Rak n'her gueler morse o vonet da gousket
Heb lavaret bemnoz eun *Ave Maria*
Ha patronez he vam a zo Santez Anna.

FRANCÈS

Ho douja ra marvad ?

MATHURIN

Ho c'haret eo a ra.

FRANCÈS

Ho c'haret, Mathurin, ker brein m'eo he galon !
Nan, nan, n'anavez mui ar garantez guirion.
Rak ne vag he galon nemet gant fallentez....
'Vit me zo guell ganen beva er baourentez,
Heb klevet an arc'hant oc'h ober trouz em yalc'h ;
Guelloc'h ez eo ganen, ker mintin hag ar voualc'h
Kregi em labour, start, kalet e pep amzer,
Ha kaout e korn an tan, pa erruan er ger,
E leac'h friko re zruz, eun tam bara zegal
Yod kerc'h pe pouloudig, pe eun tam kig sal
Ha meur a vech tremen gant eur banne zouben,
Eur vech ar bloaz hebken kregi er bara guen,
Eget beza euruz evelthan er bed-man
Ha daonet er bed all da virviken ganthan.

MATHURIN

Piou 'oar ? Keriolet, hirio eun den ker fall,
C'hell beza eurusoc'h 'vidomp-ni er bed all.

FRANCÈS

Neuze, var va buez, ha n'oun ket c'hoaz goall goz,
Lavaran vo guelelet an diaoul er baradoz.

EIL PENNAD

MATHURIN, FRANCÈS, PER. (*Fillor Keriolet*)

PER

Ohe ! Francès, ohe, deuit da stag ar zaout

FRANCÈS

Dioc'htu ; — ... Ne vank hini ?

PER

Nan, hini, mes ar maout
En euz klasket kement mont e park ar guiniz
Ma 'z oun, forz da redez, deut da veza goall skuiz.
(*Francès a ia er meaz*).

MATHURIN

Deuz aman em c'hichen, Per, azez var ar mean,
Da c'hortoz ma sono an heur da vont da goan
Emberr te gousko c'houeg pa vi en da vele.

PER

Ia, tonton Mathurin, mes o redez velse,
Lennan ket aliez leor an Aotrou Kure.
Ha d'ober d'in ar skol, varc'hoaz vintin pa zeui
Ne ouezin ket ar pezh em euz bet da zeski.

MATHURIN

Mad, eun dervez all, Per, te labouro guelloc'h
Greomp ervez hon nerz, arabat mont pelloc'h.
Da dad zo eat, marvad, azalek ar mintin
D'ar pardon, her guelelet em euz.

PER

Ia, Mathurin,
Ha me bed ar Verc'hez da rei d'ezhan sklerder
'Vit ma lavaro d'in « Ia », oc'h erruout er ger.

MATHURIN

« Ia » 'vit petra 'ta, Per ?

PER

'Vit ma c'hellin eun dez
Dont da veza beleg, oferenna bemdez
En enor d'ar Verc'hez ha da Zantez Anna.

MATHURIN

Da dad fell ket d'ezhan, vefez beleg eta ?

PER

Nan, tonton Mathurin. Mes me gleo mouez Doue,
Lavaret a ra d'in rei d'ezhan va bue.
Goulen ra diganen labourat evithan ;
Em c'halon her c'hlevan vel pa gomsfen ganthan.

MATHURIN

Neuze bez dizoursi, rak eun deiz pe eun all
Doue a zigoro daoulagad ar re zall,
Da dad lavaro « ia ».... Mes pelec'h eo chommet ?

PER

Ar pardon, Mathurin, d'ezhan a zo plijet.
Hag ar chist a zo mad.

MATHURIN

Hag emberr en distro
Var ho divesker simpl, kalz tud a vranskello.

PER

Mab Langroez, el lannec zo nevez tremenet
En eur gana. Hennez d'ar gear en euz kaset
Meur a skudellat chist ; hag he c'hreg d'euz gullet
Va zad o komz gant an Aotrou Keriolet.

MATHURIN (*a gostez*)

Evit ar memes tra, divar benn he dachen.

PER

Klevit eur c'helou all : Mevel Guigner Kerlenn
En euz lavaret d'in en euz ive gullet
Dec'h da noz, Izaak, ar sorser koz, azezet
El lannec var eur mean ; krenchat a re en er
Ha lakad da iudal ar chass dre ar c'harter.

MATHURIN

Ah ! Siouaz ! goaz a ze, ma teu Izaak en dro,
Rak beza vezo c'hoaz goall euriou barz-er vro.

PER

C'houi a gred, Mathurin ?

MATHURIN

Ia, rak ne garan ket
Gullet en hor bro an den-ze milliget.
Lavaret ve zoken : Pa dremen en hentchou
Ar maro gant he falc'h a gerz var he roudou.

PER (*kroajet he zaouarn*)

Diouallit ac'hanomp, o mam Santez Anna.

TREDE PENNAD

MATHURIN, PER, FRANCÈS

FRANCÈS

Staget em euz ar zaout ; mes an noz a freska,
Hag heb dale, varnomp kouezo ar vrumen noz,
Marteze, Mathurin, ez eo poent d'eoc'h fenoz
Kemeret, er gegin, ho plas e korn an tan.

MATHURIN

Ia, mad eo an avis, Francès, raktal ez an
D'ober vel livirit. Pa em boa evel doc'h
Goad tom em goazied hag eur galon grenvoc'h,
Ne dec'hen ket velse dirak eur vrumnennig,
Mes an den koz zo simpl vel eur c'hrouadurig.

PEVARE PENNAD

FRANCÈS HA PER

FRANCÈS

Ah ! paour kez Mathurin, den ker mad, ker zantel !
Pedi 'ra 'vit ma teui he vestr da veza El.
Nag a chapeledou 'n euz c'hoaz da lavaret
Araog ma teui he vestr da veza beleget ;
Me gred e c'houlenn re, kalz re digant Doue.

PER

Ar pezh a c'houlenn hen, me her goulen ive.
'Vit beza selaouet me roffe va bue,
Va goad.

FRANCÈS

Ha ! bugale, peseurt kalon c'heuz-c'houi ?
'Vit doare c'houi n'oc'h ket great evel ma 'z omp-ni.
C'houi rank beza breudeur Elez ar Baradoz,
Pa 'z eo guir e c'hellit karet tud a valloz,
Karet Keriolet ! C'houi ker glan ha ker pur.

PER

Piou gar ket he baeron ? den ebet a dra zur.

FRANCÈS

Eaz eo karet eun den pa vev ervez Doue,
Mes evit eun hailloun ne roin ket va bue,
Zoken pa vefe red, evit ma vo salvet ;
He blas, kreiz an ifern, gant an diaoul zo gret.

PER

Peoc'h, Francès, me ho'ped, ne gomzit ket velse !
Mar deuz tud fall er bed, guell eo pedi 'vithe,
Rak ene an dud fall en euz koustet kement
D'hor Zalver var ar Groaz, hag ene kaer ar Zent.
Setu perag, bemnoz goude koan me a bed
Hor mam Santez Anna evit Keriolet.

FRANCÈS

Mad, me lavar d'eoc'h, me, n'hell ket Santez Anna
Selaou ho pedennou, nan, nan.

PER

Perag eta ?

FRANCÈS

Divezatoc'h, Perig, c'houi glevo 'vit petra....
Ar pardon zo echu, an Aotrou deu d'ar ger.
Lez ac'hanon d'ezhan da lavaret eur ger.

P E M P E T P E N N A D

FRANCÈS, KERIOLET

KERIOLET

Perag n'oc'h-hu ket deut d'am c'hask araog an noz ?

FRANCÈS

Aotrou Keriolet, aman oann o c'hortoz.

KERIOLET (*drouk ennhan*)

Ah ! Ah ! abred oc'h euz echuet ho labour !
Eun diaoul benag marvad a zo deut d'ho sikour,
Da ziskar ar groaz koz evel 'm oa lavaret.

FRANCÈS

Da ober al labour oc'h euz d'in kemennet
Ne 'z euz deut den, Aotrou, piou garfe hen ober ?
Rak diskar ar c'hroaziou n'eo ket c'hoaz va micher.
Kroaz an hent koz a zo, atao soun en he za
Ha biken va dorn-me ne rai d'ezhi koueza,
Hen lavaret em euz, laret ran a neve.

KERIOLET

Malloz ruz, piou zesk d'eoc'h komz evelse d'in-me ?

Ha n'eo ket me ar mestr, ha c'houi Fanch ar merer,
Daoust ha n'oc'h ket d'in-me mevel ha servicher
Evit ober raktal ar pezh a lavaran d'eoc'h ?

FRANCÈS

Ia, mes en Env ez euz eur mestr all kalz brasoc'h
Eget mistri ar bed, hag hennez a zifen
Ober kement so fall a eneb he lezen.

KERIOLET

Hennez eo marteze a ro deoc'h ho kobrou
Pa 'z eo guir e kredit disprijout va c'homzou,
Senti ouz he lezen ha terri va hini.

FRANCÈS

Vel ma lare ho mam, Aotrou, guell eo senti
Euz ar mestr zo en Env, evit senti euz an den
Rak pa zeui evidomp ar mare da dremen
Goude ar vuez-man, berr evel eun uvre,
Me zonz mont da c'houlén diganthan al leve
Gounezet em buez, rakse ne glaskan ket
Eveldoc'h en ifern beza eun deiz taolet.

KERIOLET

En ifern, en ifern ! Ah ! paour keaz den spountet,
Er bed all-ze ne 'z euz na Doue na diaoulou.

FRANCÈS

Ah ! paouezit, aotrou, da laoskal malloziou
Pe varnoc'h euz an Env kouezo ar c'hurunou.

KERIOLET

Bah ! an ifern, an diaoul, traou mad evit bugale,
Komzou, mad da spounta ar re gred anezhe.
Evidon-me biken ne grenin dirazho.

FRANCÈS

Aotrou Keriolet, c'houi eun deiz a greno.

KERIOLET

Me krena, dirag piou ? Ar gurun o tarza
N'hell lakad var va fenn eur vleven da oja.
Kredi rit marteze e krenfen vel eur c'had
Ma velfen eun diaoul dirag va daoulagad.
Mar deuz eta diaoulou, me garfe ho guelet.
Pell zo ho gortozan, mes lent int vel pesked.

Ohé, Satan, deuz 'ta ; mar dout skuiz o leski,
 Me a ia, mar kerez, d'as klask ha da derri
 Da chadennou, deuz 'ta ! rak me garfe gouzout
 Pe te zo evidon pe me zo evidout.
 Rak vit bete vreman, n'em euz ket c'hoaz kavet
 Unan benag par d'in tro var dro, dre ar bed....
 Ac'hanta, ne deuit ket, breman pa 'z oc'h galvet?
 Deuit eta da velet ! va c'hleze zo lemmet ;
 Va c'hleze n'euz skuillet epad va yaouankiz
 Goad aoualc'h 'vit liva ouspen kant dor iliz.
 Ia sur oun, krena rit dirag Keriolet !
 Dirazhan en ho raog kalz re all d'euz krenet.

FRANCÈS

Tavit, Aotrou, tavit, en han' Doue me ho ped
(A gostez).
 'Vit va Itron Anna, zo breman en Envou,
 Pebeuz anken klevet gant he mab 'seurt komzou !

KERIOLET

Etre da zent, marmouz, petra leverez-te ?

FRANCÈS

Aotrou Keriolet, pedi ran va Doue.

KERIOLET

Amzer aoualc'h o po d'her pedi el lann vraz
 Pa vo great ho labour ha diskaret ar Groaz.
 Kerzit eta duhont raktal da labourat,
 Kerzit, mevel daonet ; me fell d'in, klevit mad,
 He gulet raog an noz, a dammou d'an douar....
 Ac'hanta, glevit ket ? breman ez oc'h bouzar ?

FRANCÈS

Aotrou, me n'oun ket great evit al labour-ze
 Rak, vel pep kristen mad, me 'm euz doujanz Doue,
 Ha ne rin ket ar pezh a zifen he lezen.

KERIOLET *(o tic'houina he gleze)*

Sent, kristen milliget, pe raktal deuz da benn
 Bremaig goad a strinko hag ive an empenn.

FRANCÈS

Skoit 'ta, kentoc'h ez in da velet va Doue.
 E gloar ar baradoz velin ho mam ive.

KERIOLET

Va mam, ah ! ia, va mam !

FRANCÈS

M'he guel c'hoaz o pedi

Dirag kroaz an Hent-koz.

KERIOLET

Mad, vit plijout d'ezhi,
 Evit douja d'am mam, ne dreuzin ket hirio
 Ho korf gant va c'hleze. Mes ma fell d'eoc'h chomm beo
 Tec'hit, tec'hit raktal, rak varc'hoaz marteze,
 Ma velan ac'hanoc'h, n'em bo mui a drue,
 Kerzit da glask labour, it da di eur mestr all.

FRANCÈS

Aotrou, keit a ma kavin eun tam bara zegal
 Da lakad em ginou, me lavaro bennoz
 D'ho mam ; mar d'oun c'hoaz beo, hi hebken a zo kaoz.

C'HUEC'HVET PENNAD

KERIOLET *(he unan)*

Kredi ran oc'h euruz, hirio va mam garet,
 Evidoc'h oun chommet heb ober eun torfet,
 Rak evit plijout d'eoc'h ez oun bet mad eur vech,
 Pa 'm euz klevet ho mouez, oun chommet direbech.
 Ar vouez-se a gomz d'in, he anaout a ran mad,
 Aliez e karfen dont d'he ankounac'had.
 Pa c'houlén diganen beza mad el leac'h fall,
 Ez eo hirio ken dous, ken tener ha guechall :
 « Va mab Per, emezhi, dalc'h sonj mad em c'homzou
 Pe Doue gastizo abred da bec'hejou. »
 Doue ! mar d'euz unan, m'her gortoz heb krena,
 Ha va oll dorfejou, m'en deuz c'hoant kastiza
 E kavo ac'hanon, hirio koulz ha varc'hoaz
 En hent ar blijadur, rak n'oun ket re skuiz c'hoaz.

SEISVET PENNAD
KERIOLET HAG IZAAK

IZAAK

Ah! setu eur gomz vad, Aotrou Keriolet,
Eur gomz vel ma ouzoc'h c'houi hebken lavaret,
Hag a laka an diaoul en ifern da c'hoarzin.

KERIOLET

N'eo ket bet aliez trist abalamour d'in
Izaak. — Aboue pegoulz ez oc'h c'houi deut en dro?

IZAAK

Abaoue dec'h da noz, Aotrou ez oun er vro.
Me zo deut d'ar pardon, vit dastum gueneien,
Va renk 'm euz kemeret etouez an oll beorien
A veler o pedi tro var dro d'ar feunteun;
Mes siouaz d'in, va yalc'h n'eo ket bet hanter leun.
An dud ne deuont mui da zelaou ar sorser,
Marvad vezo ret d'in dilezel va micher.

KERIOLET

N'euz ket c'hoaz pemp sizun 'm euz roet d'eoc'h kant skoet
Eat int gant an avel marvad?

IZAAK

Ia, dispignet.
Mes, Aotrou, c'houi oc'h euz peadra evit daou!
Ha n'oc'h euz ket c'hoaz d'in paet va labourou;
Ma karfec'h adare rei d'in nebeut skoejou.

KERIOLET

Malloz ruz, arc'hant c'hoaz?

IZAAK

Goustadik, me ho ped
Rak me n'oun ket bouzar, ne gredan ket ve red
Komz d'in a bouez ar penn.

KERIOLET

Komzomp eta siouloc'h.
Mes me garfe gouzout petra dlean c'hoaz d'eoc'h.

IZAAK

An eurusted, Aotrou.

KERIOLET

Penaoz e c'helfen-me
Rei d'eoc'h c'houi, sorser koz, ar pezh a glaskan ive.

IZAAK

Evit beza euruz, Aotrou, ne c'houlennan
Nemet eur skabellik en ho ti, 'korn an tan.
Rak eur servicher koz pa n'hell mui labourat
A lezer da repos; diskuiza a ra vad.
Evel guechall, Aotrou, me c'hell marteze
Ho sikour da ober troiou kam adare.

KERIOLET

Nan, n'hellan ket rei d'eoc'h ar pezh a c'houlennit.

IZAAK

Ha koulsgoude, Aotrou, me 'm euz hen gounezet
Evidoc'h 'm euz poaniet.

KERIOLET

Ia, ha paet oc'h bet.

IZAAK

Ne c'heller ket, Aotrou, paea va labourou.
Ha c'houi a c'hell zoken priza an danjerou
Zo bet ken aliez skignet a zioc'h d'am fenn,
Pa 'm euz lazet kement euz hoc'h enebourien.
N'oc'h euz mui sonj marvad ez oun me bet stlejet
A dreuz leur gear Auray evit beza krouget,
Pa oa kavet maro merc'h yaouank Toull-ar-goug
Kredi ran e ma c'hoaz ar gorden em gouzoug.
Ma ne vije ket deut an diaoul d'am distaga
E vijen bet breman en eun toull o vreina;
O vreina en ho lec'h, Aotrou Keriolet.

KERIOLET

Guir eo, ia, rei rin d'eoc'h arc'hant,..... aour ma karet.

IZAAK

Nan, nan, ne c'houlennan diganeoc'h netra ken
Nemet evel ho ki, beva en ho kichen.
Pa viot eat er meaz, me ziouallo an ti
Hag hini ne dostai pa velo beg va fri.

KERIOLET

N'hellan ket koulsgoude ho maga vit netra:

IZAAK

Me c'hell c'hoaz, ha me koz, evithoc'h meur a dra,
An traou n'heller ober nemed epad an noz,
Pa vez ar gristenien o kemer ho repos.
Traou iskiz ha spountuz, a ra d'an dud krena
Ha zoken d'an daoulin, a ra d'ezho koueza.

KERIOLET

Mad, chommit, mes bevit e peoc'h gant Mathurin.

IZAAK

Gant piou ?

KERIOLET

Gant Mathurin, a gar kement Doue,
Hag en euz servichet va mam 'pad he bue.

IZAAK

Bezit dinec'h, Aotrou, me oar mad, pa vez ret
Ken devot ha forz piou laret va chapelet.

KERIOLET

Faoz aoualc'h oc'h vit-se ; chommit eta en ti.
Boued vezo vidoc'h, keit ma vo vit ar c'hi.

IZAAK

Vit ho trugarekad, e korn an tan, ama,
Me lavaro 'vidoc'h, va chapelet kenta....
Ne c'hoarzit ket, Aotrou, kerkoulz hag ar re all
Me bede ar Verc'hez a greiz kalon guehall.
Meur a vech ez oun bet en he chapel duhont
Etal al lanneg vraz, zo hannvet « Lann ar Mont. »
He fedi em euz great vel ma ouzoun pedi,
Lakeat em euz goulou dirazhi da zevi

Mes biskoaz ar Verc'hez ne deuz va zelaouet,
Ha da c'houde, pell zo, em euz he dilezet!...
Ouspenn zo, piou morse 'n euz gulet ar Verc'hez ?
Evidon-me lavar, aman, e guirionez,
Ne gredan nag enni, na zoken e Doue.
N'em euz kredet morse nemet en eur roue,
An diaoul eo ar roue em euz bepred karet....
Ar pezh a lavaran ne blij ket d'eoc'h, me gred,
P'eo guir e chommit mud, heb laret ger ebet.

KERIOLET

Kalz re hirr eo ho teod, er vech-man, kos sorser !

IZAAK

Ah ! o komz vel ma ran, ne glasken met ober
Eun tam plijadur d'eoc'h... me c'hell dont var va c'hiz....

KERIOLET

Evit beza furoc'h, klevit mad eun avis :
Keit ma viot lojet ha bevet e va zi,
E tifennan d'eoc'h komz deuz ar Verc'hez Vari,
Pe m'ho stlapo er meaz, malloz ruz, vel eur c'hi.
Klevet oc'h euz, Izaak ?

IZAAK

Ia, rak me glev a bell.
Hag e kreiz ho kalon e klevan an avel
O c'houeza a bep tu ; ho kalon zo digor
Da gement a dremen, vel eur c'hos ti heb dor.
C'houi a zelaou heman, selaou a rit hennez,
Selaou a rit an diaoul hag ive ar Verc'hez.
Hirio c'houi zo mignon d'an diaoul hag antronoz
C'houi c'halvo d'ho sikour oll zent ar baradoz.
Guehall, m'her goar, Aotrou, c'houi a oa kalz krevoc'h,
E chapel ho kalon ne oa nemet eur c'hloc'h !
Ne oa met eun aoter, Aotrou, vit an oferen,
Aoter an drouk spered, roue du an ifern.

KERIOLET

Kaer o deuz labourat, an diaoul hag ar zent,
Me zo mestr d'am c'halon, kerkoulz ha diagent,

Ha ne lakin ennhi, nag an diaoul nag he c'hoar,
Na sent ar baradoz, na Doue, m'hen lavar.

IZAAK

N'eo ket eaz da gredi, ha dreist oll p'ho klever
O komz deuz ar Verc'hez gant kement a zouder.
Chommet.oun sebezet.

KERIOLET

Muioc'h e vezot c'hoaz,
Klevit : Keriolet a lavar bep mintin
Hag a greiz he galon, stouet var he zaoulin,
Eun « Ave Maria. »

IZAAK

Mall braz eo deoc'h neuze,
En eur gouent benag mont da viska eur zae.
Ne vo ket c'hoarzet kalz e marc'had kear Auray !
Pa vezo klevet komz deuz ar mirakl braz-se.

(Keriolet a ziskoues e ma o vont kuit.)

Marvad ez it breman da bedi ho Kuerc'hez,
Evidon-me jommo eur pennad c'hoaz er mez,
'Vit gueleit ar stered o lintra a zioc'h ker;
Ne 'z euz netra kuzet da lagad ar sorser.
Hen vel ar pezh a vo hag ar pezh a zo bet
Varc'hoaz me laro d'eoc'h ar pezh am bo gueleit.

KERIOLET

Ne ouezin ket araok ? nosvez vad d'eoc'h neuze.

IZAAK

Aotrou Keriolet, nosvez vad d'eoc'h ive.

EISVED PENNAD

IZAAK *(he-unan)*

Ia, sao da benn d'an neac'h, Izaak, ar sorser koz
Sell mad ouz ar stered, a lintr e kreiz an noz.
Nag a stered hirio a velan 'zioc'h d'am fenn
Setu an hini c'hlaez o tont da veza guen.
Nan, nan, ne 'z euz netra kuzet vit ar sorser,
Ar pezh ne ra den all, me a c'hell hen ober :

Lenn e leor an ene hag e kalon pep den,
O velet pe seurt liou e deuz he stereden.
Hini Keriolet a velan mad aze
Siouaz dre Jupiter, chenchet e deuz doare.
Betegen e lintre glaz bepred kreiz an noz,
Hag hirio en eun taol ez eo guen, mil malloz.
Unan benag ouzin a zo oc'h enebi
Hag a ra d'he zonzou ha d'he spered trei.
Mes, a pa ve ret d'in, vit echui va labour,
Gervel an oll diaoulou evit rei d'in sikour,
Ar c'had ne dec'ho ket digant ar chaseour.
Ha pa vefe ret d'in beva c'hoaz pell amzer
O klask va boued bemdez hag o lounka mizer,
Me bromet d'eoc'h, Satan, eun deiz Keriolet
E kreiz punz an ifern ganeoc'h vezo losket.

EIL LODEN

An dra-man a dremen e « Lann ar Mont », etal kroaz ar Goz Hent

KENTA PENNAD

MATHURIN, PER, BIEL, LOIS *(messaerien)*

MATHURIN *(a-zezet var eur mean e kreiz ar vanden)*

Ia, va bugaligou, guechall goz ez euz bet,
Ervez ar pezh am euz dalc'hmad klevet laret,
Eur chapellik dister savet en eur mezou
Bet hanvet gant an oll, a bell zo « Bosennou ».
Ma 'z it eun dro benag beteg Santez-Anna
Vezo diskouezet d'eoc'h ar park el leac'h ma oa.
Hon tadou, bugale, a ie di aliez
Da bedi Santez Anna, Rouanez bro Breiz.
Ar chapel a gouezaz skoet gant ar gosni
Velse Santez Anna en em gavaz heb ti.
Ne oa jommet netra met eun imaj kuzet
En douar ; varnezhan ar ieod a oa savet.

BIEL

Mes, tonton Mathurin, an dud ne ouient ket
Ez oa Santez Anna bet evelse kuzet ?

MATHURIN

An dud, va bugale, nan, ne ouient netra
Mes eun dra burzuduz a deue d'ho spounta.

PER

Petra 'ta, Mathurin ?

MATHURIN

Den ebet na c'helle
Tremen gant an ara, iskiz eo kementse,
Dre al leac'h m'oa savet chapel Santez Anna.

LOIS

Den na c'helle arat ? Petra oa kaoz eta ?

MATHURIN

Kaer d'oa an dud komz brao pe rust ouz al loened
Pa zigouezent eno, atao chomment mouzet.

LOIS

Guelet c'heuz anezho o chomm velse a zav ?

MATHURIN

Nan, n'eo ket ret guelet evit kredi eun dra.
Mes her c'hlevet am euz gant ar re d'euz guelet.

PER

Ha goude, Mathurin, petra oa digouezet ?

MATHURIN

Goudeze, klevit mad, ha pell amzer goude,
En dachen letoun-ze, hini ne dremene
Heb ober sin ar Groaz.

LOIS

Heb ober sin ar Groaz !

MATHURIN

Ia, gant spount ha respet. Breman ez euz dek vloaz,
Eun den deuz Keranna, hannvet Nikolazig,
Aliez a velaz, e kreiz eur splander vraz
Hor Mam, Santez Anna, ha ganthi e klevaz
E peleac'h oa kuzet he imaj benniget.
Ha setu, bugale, penaoz en euz kavet
Nikolazig imaj hor Patronez karet.

PER

Ni garfe mont ive, eun deiz da bardona,
Da velet an traou kaer zo e Santez Anna.
Rak ni gar anezhi hag on deuz eur c'hantik
Great evit enori Itroun Nikolazig.
Ma ra plijadur d'eoc'h ni a ia da gana
Ar c'hantik nevez great d'hor Mam Santez Anna.

MATHURIN

Kanit, va bugale, plijadur reot d'in,
Meuli Santez Anna eo peden Mathurin.

KANTIK

Deut omp, o Mam Santez Anna,
Rouanez ar Vretoned,
D'ho pedi bete Keranna
En ho ti benniget.
Deut omp da c'houlén diganeoc'h
Pedi 'n Aotrou Doue
Vit ma c'hellimp beza krenvoc'h
Eneb ar fallente.

UNAN

Santez Anna, o Mam garet,
Mam ar vugaligou,
Roit sklerijen d'hor spered
Ha nerz d'hor c'halonou.
Kreskit, o Mam garantezuz,
Kreskit hor c'harantez
Evit ho mab bihan Jesus
Epad hon oll vuez.

MATHURIN

Sellit, sellit, duhont..... red varlerc'h da zenved,
Biel, ha kers buhan, e maint oll o lamet
E park ar guviniz.

PER

Ia, ia, hag e park va zad !

OLL (*assamblez*)

Kerz 'ta.

BIEL

Raktal, eat oun, ne raint ket re govad.

MATHURIN

'Vidoc'houi, bugale, kanit c'hoaz eur c'houlplat,
Da c'hortoz ma vezo distro ho kamarat.
Livirit ar c'houlplat zo evit ar pec'her,
Vit ma vezo Doue truezuz 'n he ge'ver.

AR VUGALE

O Santez Anna, ni ho ped
Evit ar bec'herien,
Evit an eneoù touellet
Gant hoc'h enebourien,
O Mam, outho bezit true
E maint var an hent fall,
Koulsgoude int ho pugale
Kerkoulz hag ar re all.

EIL PENNAD

AR MEMEZ RE HA BIEL

BIEL

Ah! tonton Mathurin, aman 'z euz goulén d'eoc'h ;
E ma Keriolet o tont beteg ennhoc'h.

LOIS

Hein! petra leverez ? erru Keriolet,
Me ia pell ac'halen, fell ket d'in he velet.

BIEL

Oh! na me kennebeut.

MATHURIN

Ma ra va mestr aoun d'eoc'h,
N'oc'h euz oll da ober nemet tec'het pelloc'h.

PER

Ma karit, Mathurin, me jommo 'n ho kichen.

MATHURIN

Nan, nan, te kennebeut, kerz gantho da c'hoari
Guéloc'h eo beza kals vit ober ar barti.

PER

Mad, tonton, kenavo.

MATHURIN

Ia, va mab, kenavo.

TREDE PENNAD

MATHURIN (*he-unan*)

An Aotrou o redeg var va lerc'h ker mintin!
Petra c'helfe beza? petra lavaro d'in?
Goal zonjou adare a zo en he spèred!
Aoun em euz, kroaz santel vec'h hirio diskaret!

PEVARE PENNAD

MATHURIN FRANCÈS

FRANCÈS

Diskaret, Mathurin, petra c'heuz lavaret?
Biken, tre ma vinn beo, d'an traon ne vo taolet.

MATHURIN

Ah! Francès, c'houi aman?

FRANCÈS

Ia, tonton Mathurin,
Aman vèn aliez, da noz pe da vintin,
Evit diouall ar Groaz ez oar o klask diskar,
Ha keit a ma vezo dindan va zreid douar
Ne velot ket ar Groaz bruzunet a dammou.

MATHURIN

Ah! plijadur am euz o klevet ho komzou;
C'houi a zo eur c'hristen, Francès, vel hon tadou,
Mes goude ma 'z oc'h bet, deuz ar maner tec'het,
Livirit d'in, Francès, penaoz oc'h euz bevêt?
Kavet oc'h euz labour?

FRANCÈS

Ia, rak var an douar,
Al labour ne vank ket nemet d'an neb a gar.
E pep kear e kavan ha bevanz ha labour,
Rak breman, Mathurin, me a zo devezour,
Me ia a gear da gear, va benveg var va skoaz;
Hirio e troc'han lann e mereuri Fanch vraz,
Pa 'm euz klevet kana, ez oun deut da velet
Ha da c'houlén ouzoc'h doare Keriolet.

MATHURIN

Bremaig en em gavo, Francès, ha ma karet
Gortoz, Kroaz ar Goz-Hent ne vo ket diskaret

FRANCÈS

Gortoz rin, Mathurin.

MATHURIN

Mad.

FRANCÈS

Ia, me a jommo,
Bete guelet ar Groaz... ha neuze.... m'her lazo.

MATHURIN

Oh! Francès.

FRANCÈS

Vit an dud 'n em zav eneb Doue.
Hor c'halon e deuz bet atao re a drue.
Her c'hlevet ran o tont; guell ve d'in marteze
Araog vo digouezet mont eun tam a goste.

MATHURIN

Ia, Francès, mad a rit.

PEMPED PENNAD

MATHURIN, KERIOLET

KERIOLET

Ah! paour kez Mathurin,
Var ho lerc'h e redan azaleg ar mintin,
Rak hirio, c'houi hepken a c'hell va c'honsoli!

MATHURIN

Petra zigouez eta, petra zo a nevez?
Aotrou.

KERIOLET

Eun dra iskiz ha nevez em buez,
Ha d'eoc'houi da genta fell d'in hen lavaret,
Rak c'houi dreist ar re all a gendalc'h d'aim c'haret!

MATHURIN

Ia va mestr, me a gar atao mab ar zantez
E deuz bet evidon kement a vadelez.

KERIOLET

Klevit 'ta, Mathurin, ar pezh so a nevez,
Abaoue hanter noz, me a gred e Doue.

MATHURIN

Ha klevet mad am euz? Livirit adare.

KERIOLET

Ia, breman koulz ha c'houi, me a gred e Doue.

MATHURIN

Oh! pebeuz levez em c'halon a zantan
O klevet ho komzou.

KERIOLET

Ia, ia, kredi a ran.

MATHURIN

Mes perag e krenit o laret kementse?

KERIOLET

Oh! ia, krena a ran, ha piou all ne grenfe
Ha c'houi ive em lec'h, c'houi o peffe krenet,
O velet, kreiz an noz, ar pezh 'm euz-me guelet.
Ia, krena a ran c'hoaz hag atao me greno
Ken a ouezin ervad Doue am fardono.

MATHURIN

N'o pet douetanz ebet, Aotrou, var gementse,
Rak rei ar pardon eo micher 'n Aotrou Doue.
Mes livirit, m'ho ped, ar pezh oc'h euz guelet.
Livirit d'in penaoz Doue 'n euz ho spoutet.

KERIOLET

Oh! Mathurin, an noz a bez 'm euz tremenet
Egoueled an ifern, e mesk ar re zaonet.

MATHURIN

Hag an diaoulou, Aotrou, n'o deuz ket ho talc'het?

KERIOLET

Nan, Mathurin.

MATHURIN

Neuze unan benag krenvoc'h
Eget an oll diaoulou a zo a du ganeoc'h.

Santez Anna, marvad, e deuz ho tionallet.
Ah ! mil bennoz d'ezhi ha d'he merc'h benniget.
Mes kontit d'in, mar plij, an uvre oc'h euz bet.

KERIOLET

Ar pezh am euz guelet n'eo ket en eun uvre,
Mathurin... Eat e oan e koulz mad d'am guele,
Ha var dro hanter noz me 'n em zant o tisken
Ker buhan a ma kouez ar glao deuz ar goabren,
En eun toul doun ha striz evel eur punz, ha tenval
Vel eun nosvez c'hoan pa n'euz ket a stered.
Disken ran velse, a bez, korf ha spered,
Va daoulagad spountet, digor e kreiz an noz,
Hag heb gouzout, siouaz ! petra 'm oa da c'hortoz.

MATHURIN

O va Zalver Jesus.

KERIOLET

Kerkent en em gavan
Etal dor an ifern, ha varnhi e velan
Gant lizerennou tan ar c'homzou-man skrivet :
« Lezit pep esperanz, pa 'z oc'h aman lounket. »
Guelet ran eun toul striz evel ginou eur forn,
Diouallet gant an diaoul, eur forc'h hirr en he zorn.
Kaset, en despet d'in, doun ebarz en toul-ze,
Kreiz an denvalijen a bep tu me vele
Aered louz ha prenved var ar fank o ruza,
Ha touseged varnon a bep tu o sailla.
Me gerze en ho mesk heb klevet trouz ebet,
C'hoant em boa da grial ha krial n'hellen ket ;
Gant ar moget fleriuz ez oan prest da vouga,
Eun tan beo dre va c'horf rede hep ehana,
Bete mel va eskern a zanten o virvi ;
Klevet a rean eur vouez, atao memez hini :
Ped heur a zo sonet ?... Eternite.....
Hag an oll dud daonet kerkent a m'her c'hlevent,
N'em lakea da iudal ha da skrigna ho dent,
Ha me, ouz ho c'hlevet a lavare ive :
Setu aze va lod vit an eternite,
Daonet oun eveltho, daonet da virviken,
Ha va c'halon em c'hreiz a oa leun a anken !

MATHURIN

Penaoz oc'h euz gallet tec'het deuz al leac'h-se ?

KERIOLET

Oc'h ober sin ar groaz, o laret adare
Va « Ave Maria », ha sur 'oun, ar Verc'hez
Euz lein ar Baradoz deuz klevet va mouez ;
Rak kerkent em guele ez oun en em gavet
Beo mad dre c'hras Doue ha da vad difunet.
Mez piou a lavaro pebeuz spount hag anken
A zo var va spered ! nan, den na c'hell kompren.
Pa velan ar bern fang a zo var va c'halon,
Ah ! paour kez Mathurin, penaoz goulenn pardon ?
Penaoz c'helfe Doue ouzin ober eur zell ?

(Koueza a ra d'an daoulin dirag ar Groaz).

O Jesus, va Zalver, dirag ho Kroaz santel,
Pec'her ma 'z oun ! karget a bec'hejou mezuz,
Me 'n em daol d'an daoulin, hag ho ped, o Jesus,
Dizamit va ene deuz bec'h he bec'hejou,
Ha goalc'hit anez'han e goad ho kouliou.

MATHURIN

Fizianz, fizianz, Aotrou, penaoz c'helfe Doue
Chomm heb dont d'ho selaou pa bedit evelse ?

KERIOLET

Mathurin, me zo bet ker fall beteg hirio !

MATHURIN

An den c'hell chench atao, epad ma 'z eo c'hoaz beo.

KERIOLET

Betegen n'em euz great nemet hada goall louzou.

MATHURIN

Mes c'houi c'hell ho leski e tan ar vertuziou.

KERIOLET

Em c'halon-me ne 'z euz met fank ha loustoni !

MATHURIN

Gant eun taol skubelen, c'houi a 'netai an ti.

KERIOLET

Evit he goalc'hi mad me rai ar pezh so ret,
Mes goude, Mathurin, goude ma vezo goalc'het.
Vit va oll fec'hejou, penaoz c'hellin paea ?

MATHURIN

Doue a ziskuezo an hent c'heuz da heulia.

KERIOLET

Evit eur pec'her braz, siouaz, vel ma 'z oun-me
Ne 'z euz nemet eun hent da vont da gaout Doue.

MATHURIN

Guir livirit, Aotrou, ne 'z euz nemet eun hent,
Mes an hent-se a gass d'an envou kalz a zent,
An hent-se zo hannvet hent striz ar binijen,
Kemerit anezhan, na zistroit ket ho penn
Da zellet var ho lerc'h, dalc'hit mad, da c'hortoz
Ma plijo gant Doue rei d'eoc'h he Varadoz.

KERIOLET

Vit ober pinijen, me lez va feadra,
En eur gouent benag, me fell d'in 'n em denna,
Mathurin ; ha raktal evit se 'm euz sonjet
Mont da c'houlén digor da di ar Chartreuzed.

MATHURIN

Ah ! perag eo maro ho mam, an itron vad,
Daelou a levenez vije 'n he daoulagad,
O velet he mab Per o kemeret an hent
A ziskoueze d'ezhan. Ia, kerzit d'ar gouent,
Eno, hed ho puez, c'houi a rai pinijen.
Heb dale hoc'h ene deui da veza ker guen
Ma chommo an Elez souezet ouz he velet.
(Klevet a rer ar vugale o kana an trede kouplat)

KERIOLET

D'ar Zent ha d'ar Verc'hez o d'euz va diouallet
D'eomp breman, Mathurin, da lavaret bennoz.

C'HUEC'HVET PENNAD

FRANCÈS *(he-unan)*

Adreg ar c'harz edon o selaou anezho,
Klevet am euz ar pezh lavarent etrezho,

Souezet meurbed ez oun ! Ne 'z euz ket eun heur c'hoaz
Me am bije roet gounidegez eur bloaz
D'an hini vije deut da rei d'anaout d'in
Tlie Keriolet d'an diaoulou trei kein.
Chommet oun sebezet.... An teodou zai en dro,
Ha sur oun, dizamant an oll a lavaro :
'N Aotrou Keriolet a rea goap ouz Doue,
Divar goust an ifern hag an diaoul e c'hoarze !
Ah ! ah ! Lezet en deuz ar zon-ze a gostez,
Ober rai pinijen ar rest euz he vuez.
Guell a ze velato, ma touj breman Doue....
Gant ma chommo atao eun var an hent-se !
Mes klevet a ran trouz.

SEISVET PENNAD

FRANCÈS, IZAAK

FRANCÈS

C'houi, Izaak, ken abred ?

IZAAK

Ia, Francès.

FRANCÈS

Daoust ma 'z eo erru koz, eur c'hi mad
A gar c'hoaz avechou redege varlerc'h ar c'had.

IZAAK

Ma n'oc'h euz ket traou all bravoc'h da laret d'in....

FRANCÈS

Ah ! mezaoun ne 'z oc'h ket var ho tu da vintin,
Ret e vezo marvad komz d'eoc'h var an daoulin....
Mes..... ma komzan brao d'eoc'h, c'houi laro marteze
Perag ez oc'h aman ken abred o vale ?...

IZAAK

Kredi ran e c'hellan, evel an oll gristenien
Dont aman 'tal ar Groaz, da ober va fedén.
Hag ouspen, klevit mad, eur marmouz veldoc'houi
Ne zifénno ket d'in mont er meaz euz va zi,
Evit dont, m'am euz c'hoant, dirag kroaz hor Zalver
Da laret bep mintin ha bemnoz va « fater ».

FRANCÈS

Non pas, komzomp aman, loen fall ha kos sorser !
Aman e kreiz al lann, dirag kroaz hor Zalver.
Ar Groaz savet pell zo vit hon dioual bepred
Hag a glaskit diskar, ia, c'houi den milliget.

IZAAK

Me diskar eur groaz ! Ah ! setu c'hoaz eur c'helou !
Ne 'z euz ket eur c'hristen startoc'h 'n he greansou.
Nan, nag er barrez-man, nag el leac'h all tro-vâr-dro.

FRANCÈS

C'houi er c'hristen ? Siouaz ! ia, eun diaoul deut er vro
Vit hada en hon touez pep seurt fallagriez.
Deuz ar mintin d'an noz, petra rit-hu bemdez ?

IZAAK

Laret va chapeled, Francès, pedi Doue.

FRANCÈS

Ia, en deiz ma 'z oc'h deut da veva d'ar maner,
Ha me, gant hoc'h Aotrou, kaset kuit vel eul laer,
C'houi oc'h euz great an neuz, Izaak, da chench bue.
Vâr an hent hag er park pep-hini ho kuele
Gant eur c'hos chapelet en ho torn o vale.
Mes ar bleiz n'en deuz great nemet chench he groc'hen,
Vit golo ar zae du, c'houi laka unan venn ;
Mes kamarad, pell zo, Francès hoc'h anavez ;
Ho lagad a lugern dindan ho tok nevez.
Eun den evel doc'houi a c'hell chench guiskamant,
Evel ma c'hell an diaoul lakad dillat eur zant.
Tro pe dro kouls goude e veler beg he fri !
Hag hirio va c'henderv 'm euz guelec'h hoc'h hini.
Hennez ne chench ket liou vel ma ra ar stered,
He anaout mad a rer pa vez eur vech guelec'h.

IZAAK

Mad, pa 'z eo guir oc'h euz dizoloet va c'hartou
D'ho tro breman ive da zelaou va c'homzou.
Ia, me zo deut hirio d'al lanneg da ober
Eul labour gortozet abaoe pell amzer.
Deut oun evit diskar houman, kroaz ar Goz-Hent.
Mes perag ez oc'h-c'hui 'n em gavet var va hent ?

FRANCÈS

Aberz Doue oun deut evit ho kastiza !
Ho teod, den milliget, a dleffen d'eoc'h troc'ha,
Ho teod ampoezonet evel hini eun aer
Hag a daol var ar vro ar fank hag ar geier
A zo en ho kalon. Perag n'oc'h ket maro
Pell zo ? C'houi torfetour ha drouk spered ar vro ?
An dud ker fall ha c'houi ha dleffe beza lazec'h,
Ne veffe ket kement a fallagriez er bed.

IZAAK

Oh ! Francès, me n'oun ket ker fall ha ma sonjit.

FRANCÈS

Ker fall ! serrit ho peg, n'oc'h nemet eun toueller,
C'houi zo eur gaouiat koz, eun den vil, eur sorser,
Ha zoken, pell a zo e tleffec'h beza bet
Euz eur pennad korden staget berr ha krouget !....
Mad, e ma deut an heur hag ez it da baea
Evit kement torfed oc'h euz great er vro-ma.
Var ho taolin, sorser, dirag ar Groaz santel ;
Dirag Salver ar bed, plegit ho penn, izel.

IZAAK

D'in-me dirag eur mean larit plega va fenn !
Nan, nan, dirag eur groaz, plega va fenn, biken !

FRANCÈS

Mad, goaz a ze 'vidoc'h. Hola, klevit paotred,
Deut aman da velet ar c'hos sorser daonet.

EISVED PENNAD

FRANCÈS, IZAAK, YVON, YANN, MICHEL.

YVON

Petra zo 'ta Francès ?

FRANCÈS

Sell Yvon.

YVON

Ar sorser

Edomp o klask paka abaoe keit amzer.

Ah ! sorser milliget, digouezet eo ho tro
Da baea kement drouk c'heuz great ebarz ar vro.

MICHEL

N'eo ket c'houi c'heuz roet d'am zonton deuz Kerval
Louzou ampoezonet ?

YANN

Ha d'am mam kement all !
Mar d'eo maro va mam, o sorser milliget,
Breman ez euz tri bloaz, c'houi oc'h euz he lazet !

FRANCÈS (*da Izaak*)

Respontit 'ta breman.

YVON

Va zud-me zo er bez,
Ha c'houi eo a zo kaoz, tad ar fallagriez !

FRANCÈS

Piou a c'helfe kounta torfejou an den-man ?
Rak n'euz ket goall bell c'hoaz ez oa mestr er vro-man.
Mes, hirio, sorser koz, n'oc'h euz den d'ho tifen.
Allo ! deuit, paotred, digasit eur gorden,
Stagomp al labouz-man huel 'beg ar vezen.

. (*Iann a denn eur gorden deuz he zac'h*).

YANN

Houman am boa prenet evit staga va zaout,
Guelloc'h implij vithi, n'helfen biken kaout.

FRANCÈS (*da Izaak*).

Da Zoue ha d'an dud petra c'heuz da laret ?
Araog mont d'an ifern da gaout ho konsorted.

IZAAK

Goulen truez ouzoc'h ne dal ket kalz ar boan
Rak ho kalon a zo ken kalet hag ar mean.
Eun dra zo koulsgoude hag a dleffec'h rei d'in :
Lezel c'hoaz ac'hanon beteg varc'hoaz vintin.

(*Lakad a ra eur c'hlin d'an douar*).

FRANCÈS

Ho ! ho ! konsort, re bell oc'h euz dija bevet ;
Guelloc'h laza ar bleiz kerkent ma 'z eo paket.

En ho sav.... c'houi paotred, skoulmit mad ar gorden.

IZAAK

Ah ! muntre, ra gouezo ar gurun var ho penn
Gant va malloz.

FRANCÈS

Allo ! paotred, hastomp buan
Krouga ar sorser-man, rag me gred e klevan
Bugale, o tostad.

IANN

Ia, 'maint erru aman.

NAVED PENNAD

AR BAOTRED, AOTROU KURE PLUVIGNER

AN AOTROU KURE

Dervez mad d'eoc'h, paotred.

IANN

Ah ! an Autrou Kure !

AN AOTROU KURE

Ia, me eo, mes heman a stlejit evelse
Piou c'helfe beza ?

YVON

Mad, Aotrou Kure, sellet,
Guelloc'h e ve bet d'eoc'h ne vijec'h ket gulet
Ken abred el lanneg.

AN AOTROU KURE

Perag, va mignoned ?

YVON

Rak var dro ar sorser edomp o labourat

AN AOTROU KURE

Izaak a zo ganeoc'h ? he anaout a ran mad.

FRANCÈS

Ez eomp d'hen lakad eun tamik da zansal
En ear, evit gouzout ma oar ober ar *bal*
Kerkoulz a ma ouie laza tud gant louzou.

YVON

Ni a ia d'he grouga evit he dorfejou.

AN AOTROU KURE

Mad, selaouit, paotred, eul labour fall a ret,
Araog laza eun den, e rank beza barnet.

YVON

Heman a zo barnet gant oll dud ar c'harter,
Hag e pep ti, Aotrou, he varo c'houlenner.

YANN

Ah ! ne vo ket gueleit kalz a dud o ouela
En deiz-ma vo kaset d'ar vered da loja.

AN AOTROU KURE

Koulsgoude, mignoned, kaer o po lavaret,
Rei ar maro d'eun den, evelse n'heller ket.

FRANCÈS

Mad, ni ia koulsgoude, d'ober outhan dioc'htu,
Rak vare'hoaz marteze ne gavimp ket an tu
D'ober d'ezhan paea.

AN AOTROU KURE

Da biou en euz laeret?

AR PEVAR ASSAMBLEZ

D'eomp-ni....

FRANCÈS

Kaset en euz mam Yvon d'ar vered.

MICHEL

Hèn eo zo kaoz mar d'eo va breur mac'hagnet.

JOB (*erruet varlerc'h ar re all*).

Va c'hoar-me zo maro, hèn en deuz he lazet !
Lazet da ugent vloaz, e kreiz he yaouankiz
Eun deiz ma oa o tont euz eur fest er Ginkiz.

FRANCÈS

N'euz ket var an douar eun all ker fall hag hèn.

AN AOTROU KURE

Ne domp-ni ket ive paour keaz pec'herien ?
Ha Doue koulsgoude a lez ganeomp buez.
Ar c'hristen a bardon atao gant madelez.

Sellit adreg ho kein, guelit piou hor zelaou,
Jesus ! a zo maro evit hor pec'hejou.
Hor Zalver he-unan, a c'houlenn dreizoun-me
Diganeoc'h, mignoned, pardoni d'an den-ze.

FRANCÈS

Mad, evel hor Zalver, pardonomp eur vech c'hoaz.

AN OLL ASSAMBLEZ

Ia, Francès.

FRANCÈS

Pardonomp aman dirag ar Groaz.
Ah ! sorser, c'houi a c'hell lavaret trugare
D'hor Zalver Jesus-Christ ha d'an Aotrou Kure.

IZAAK

Eur bedennig benag livirin evithe.

FRANCÈS

Breman e c'hellit mont ; it, mes araog pellad,
Me ho ped da zelaou eur ger c'hoaz ; klevit mad
Izaak, tec'hit hirio da vad deuz ar c'harter,
Tec'hit pell deuz ar vro, gant aoun marteze
Ne vemp ket evidoc'h ken truezuz bemde ;
It d'eur vro benag all da velet ar stered.

IZAAK

Klevet 'm euz ; marteze c'hellimp c'hoaz 'n em velet.

FRANCÈS

Goaz a ze d'eoc'h neuze.

IZAAK (*etre he zent*).

Me garfe e kouesfe
Varnoc'h malloz an diaoul ha va malloz ive.
(*An Aotrou Kure hag ar baotred daoulinet dirag ar Groaza lavar*)
« Pardonit d'eomp hon offansou evel ma pardonomp d'ar
re o deuz hon offanset. »

AN AOTROU KURE

Paotred, mad oc'h euz great pardoni d'ar sorser,
Breman e c'hellit mont gant joa, euruz d'ar ger,
Euruz vel kristenien, o deuz great ho dever.

TREDE LODEN
(*E bali kastel Kerlois*)

KENTA PENNAD

MATHURIN (*he-unan*)

Allas ! Allas ! perag n'oun ket maro kentoc'h !
Er bez da viana 'm bije kavet ar peoc'h !...
Marvet vijen euruz en deiz ma 'm euz guelet
Va mestr karet o vont da di ar Chartreuzed.
Ha d'he vam en envou em bije lavaret :
« Ah ! va itroun Anna, aoualc'h oc'h euz pedet,
» Bezit euruz, ho mab a deuio d'ho kichen,
» Rak eat eo d'ar gouent da ober pinijen. »
Allas ! tri miz goude ez eo lammet er mez,
Da veva en he roll, goasoc'h eget jamez.
He vuez 'vit an oll, oa eur vez da velet,
E pep korn deuz an ti ganeomp vije klevet
O toui, blasphemi a eneb ar Verc'hez
Hag a eneb Doue, ar Zent hag an Elez.
Ankounac'heat ganthan an uvre en d'oa bet,
Bremen e lavare ne 'z euz Doue ebet.
O va Doue ! perag n'oun ket marvet kentoc'h.

EIL PENNAD
MATHURIN, YVON

MATHURIN

C'houi zo aze, Yvon, ra vo ar peoc'h ganeoc'h.

YVON

Perag e komzit d'in deuz ar peoc'h, Mathurin ?
Kollet em euz ar peoc'h, biken ne deuio d'in !
Va bleo zoken zo deut raktal da veza guen
Goude m'em euz kollet an hini a garien.

MATHURIN

Paour keaz tad, kompren ran ho poan, eur boan dispar,
Koll ar pezh a garer muia var an douar
A zo kalet, dreist-oll pa deu ar goaleur-ze
Goude kalz a re all ! Poanüs eo kementse !
Savit ho taoulagad breman varzu an Ee,
C'houi velo ne 'z oc'h ket ankounac'heat ganthe.

YVON

Ah ! siouaz, Mathurin, va unan oun er bed
N'em bo mui em buez tam plijadur ebet,
Tenn e kavan kosad heb eun tam karantez,
Va mab Pier ken karet, va merc'h ha va maouez
Zo bet e trivac'h miz gant ar maro sammet.
Va c'halon baour em c'hreiz a zo evel rannet.
Perag eo bet Doue ken kalet evidon ?

MATHURIN

Dre ma ho kar muioc'h 'vit ar re all, Yvon.
N'eo ket mad evidoc'h, ehomm atao da zonjal
En ho stad hoc'h-unan, o pet sonj er re all,
Er re zo gant Doue ; sonjit ez int euruz
Ha ne ankoueont ket ho zad karantezuz ;
Kementse a ra vad, ha n'eo ket guir, Yvon ?

YVON

Mathurin, ho komzou a ra vad d'am c'halon.
Evel ma kouez ar glao var ar park dizec'het
E kouezont em c'halon gant ar glac'har rannet.
Koulsgoude, Mathurin, ne vin ket konsolet
Ken am bezo kavet ar mab am euz kollet.

MATHURIN

Mad, Yvon, eun dra 'm euz c'hoaz da lavaret d'eoc'h :
Doue n'euz goulennet ho mab Pier diganeoc'h
Evit beza beleg, c'houi oc'h euz refuset.
Livirit din breman pe 'z eo guir pe n'eo ket.

YVON

Ia siouaz, Mathurin.

MATHURIN

Doue n'euz kemeret

Ar pezh a oa d'ezh.

YVON

N'em boa morse sonjet

E kementse. Bremen velan e guirione
Perak oun bet skoet gant an Aotrou Doue !
N'em euz ken da ober nemet plega va fenn.

MATHURIN

« Bremen klevan ganeoc'h komzou eur guir gristen.

YVON

Ia ! Nag a bec'herien a velan koulsgoude
Hag a zeblant euruz ha deut mad da Zoue,
Ken euruz ma klever ar re all o laret
Ra ket Doue atao evel ma 'z eo dleet.
Piou en euz great biskoaz muioc'h a fallentez
Eget Keriolet penn-da-benn he vuez ?
Ha koulsgoude piou zo eurusoc'h egethan ?
Karet raffien guelet, ha zoken er bed-man
Doue o kastiza ar pec'her kaledet.

MATHURIN

Peoc'h, en han Doue, arabat lavaret
Traou velse ; kement tra ra Doue zo great mad,
Doue zo eternal; her gouzout a rit mad,
Hag an oll diganthan o d'eo gant largetez
Ervez an oberou great epad ho buez.
Abalamour da ze em euz poan o kredi.
C'helfe biken va mestr en hent mad distrei.
Goude seurt buez !...

YVON

Ia, siouaz, pell a zo
E ma Keriolet dre oll o redeg bro.

MATHURIN

Varc'hoaz e vezo bloaz m'en deuz hon dilezet
Evit mont da heulia relijion an Turked.
Hag abaoue, Yvon, dalc'h-mad pedan Doue
Da ober evithan ervez he volonte.

YVON

Mad a rit, Mathurin.

(Klevet a rer kana, a bell).

Santez Anna, mam a garantez
Taolit varnomp eur zell a druez.

YVON

Ah ! Ah ! pelerined,
O tistrei deuz pardon Santez Anna Vened.

MATHURIN

Francès a zo gantho, anaout a ran he vouez
Sklear vel hini ar voualc'h pa gan e beg ar gouez.

TREDE PENNAD

MATHURIN, YVON, FRANCÈS

MATHURIN

Digouezet oc'h, Francès ?

FRANCÈS

Ia, Mathurin.

YVON

Petra

C'heuz guelet a nevez duhont e Keranna ?

FRANCÈS

Kement a draou, Yvon, ma vo ret d'in gortoz
Evit ho c'honta d'eoc'h ma vezo deut an noz.

YVON

Kalz tud a oa eno ?

FRANCÈS

Ia, tud a vandennou
Deuz kement bro a zo, kalz a viskamanchou.
An hentchou a oa leun, biskoaz n'em euz guelet
En eur gear ker bian, kement a dud bodet.

MATHURIN

Santez Anna, marvad, a zo kontant neuze !
Mes n'oc'h euz ket, Francès, klevet eno doare
Keriolet ? Etouez eur vanden dud velse
E c'heller meur a vech klevet ouz he gelou.

FRANCÈS

Nan, Mathurin, diez eo heulia he roudou
Mes, ma karit gortoz, eur paour am euz kavet
Var an hent, hag a zeu da Gerlois da gousket.
Gant hennez, marteze, klevot ar c'heloïou,
Ar beorien aliez, oar kalz a neventiou.

YVON

C'houi oc'h euz he bedet da zont beteg aman ?

FRANCÈS

M'euz ket. E kichen ar feunteun e Keranna
Me am euz he velet evit ar vech kent.

He zillad dislivet, e pep korn penseliet
Ha goloet a fank er c'hreier dastumet,
A verke mad d'an oll oa braz he zienez ;
Ne gaver ket paouroc'h, an oll o d'oa truez.
Ne c'houlén koulsgoude digant den aluzen,
Vel ma ra peurvuia ha dre oll ar beorien...
Goudeze m'her guelaz a nevez en Iliz,
En he gichen edon penn da benn an ofiz.
Biskoaz n'em euz guelet den ebet o pedi
Ker kaloneg hag hén. Zoken, huanadi
Rea ive bep mare, hag euz he zaoulagad
Savet varzu an Env, me am euz guelet mad
Daelou puill o koueza ; c'hoant em boa da c'houlén
A beleac'h e teue varnhan ker braz anken.

YVON

Perag n'oc'h euz ket great ?

FRANCÈS

Nan, n'em euz ket kredet.
N'euz ket c'hoaz eur c'hart heur me am euz he velet
Var an hent ; dont a ra goustad, gant kalz a boan,
Marvad 'neuz c'hoant beza aman da vare koan.

MATHURIN

Guelloc'h e ve bet d'eoc'h, Francès, chomm d'her gortoz.

FRANCÈS

Diskouezet em euz d'ezhan an hent ; araog an noz
E vezo digouezet.

MATHURIN

Vidomp-ni, Bretoned,
Eur paour a zo eur breur, vit he zigemeret
Roer atao d'ezhan guella tam zo en ti.
Ma karit ez eomp d'hen diambrouk hon tri...

YVON

D'aimp ket pell, Mathurin, e ma erru aman.

PEVARE PENNAD

MATHURIN, FRANCÈS, YVON, KERIOLET (*goloet
a druillou*)

KERIOLET

Ra vezo hor Zalver e pep leac'h benniget.

AR RE ALL

Hag e pep amzer he hano zantel meulet.

MATHURIN

Poent oa deoc'h digouezout, ezom c'heuz da goania.

KERIOLET

Ia, rak skuiz maro oun, n'hellan mui n'em stleja
Ha poan vraz em euz bet o tont beteg aman.

MATHURIN

Marteze n'oc'h ket bet beteghen er vro-man ?
Livirit d'eomp, mar plij, euz peseurt bro ez oc'h ?

KERIOLET

Er vro-man pell a zo ne deuan ket pelloc'h.
Ha buan vez ankoueet an nep ne veler ket.

FRANCÈS

E Keranna hirio me am euz ho kuele
Evit ar vech kenta. (*A gostez*). Anaout a ran ar vouez.

KERIOLET

Me am euz ho kuele, ha meur a vech, Francès.

FRANCÈS

Ah !

YVON

Ah !

KERIOLET

Ankounac'heat oc'h euz kroaz ar Goz-Hent ?

MATHURIN (*oc'h ober sin ar Groaz*)

Ah ! ma Doue, hén eo.

FRANCÈS hag YVON

Hén eo, Keriolet.

KERIOLET

Ia, hèn eo he-unan.

FRANCÈS

Ar paour am euz gulet

E kichen ar feunteun ?

MATHURIN

Ha possubl e veffe

Ez eo c'houi, va Aotrou a velan er stad-se ?

C'houi, guechall ker kempenn, ken neat var ho tillad,

C'houi eo a zo aze dirag va daoulagad ?

KERIOLET

Ia, me eo, Mathurin, me eo ar mab prodig,

Me eo Keriolet en eur stad reuzeudig.

Ne gavot mui ennhon Keriolet guechall.

MATHURIN

Ma ve guir kementse ! Marteze klevan fall.

FRANCÈS

Ah ! ia, ma veffe guir !

KERIOLET

Beteg fin va buez,

Va c'halon 'm euz roet da Zoue, d'ar Verc'hez.

Va madou, va buez, kement 'm euz zo d'ézho.

MATHURIN

Ah ! Guerc'hez benniget, kavet oc'h euz ho tro.

Digant an drouk spered ha deuz he grabanou,

Euz an ifern zoken c'houi denn an eneou.

Bennoz d'eoc'h.

KERIOLET

Mathurin, ia mil bennoz d'ezhi,

Rak digaset e deuz an diaoul d'am zavetei.

YVON

An diaoul ?

FRANCÈS

Sonj oc'h euz, Aotrou, penaoz guechall

E komzec'h a Zoue ha deuz ar spered fall ?

C'houi c'halve anezhan evit dont dirazoc'h

Hag an diaoul spountet a dec'he pell ouzoc'h.

KERIOLET

Ia, siouaz, me neuze oa falloc'h egethan !

Ha gouzout mad a ran tleffen beza ganthan

O leski en ifern !

FRANCÈS

Me zonzj veldoc'h ive.

KERIOLET

Ar Verc'hez koulsgoude e deuz bet c'hoaz true

Diouzin, pec'her paour, brasa pec'her zo bet !

Ra vo hano Doue e pep amzer meulet.

AR RE ALL (*assamblez*)

Ra vo hano Mari gant an oll benniget.

MATHURIN

Ma n'oc'h ket c'hoaz re skuiz, Aotrou, kent mont en ti

E raffec'h, me a gred, plijadur d'emp hon tri,

Ma karfec'h kounta d'emp penaoz hag e pe bro

Oc'h euz kavet, Aotrou, an hent da zont en dro ?

KERIOLET

Re hirr veffe d'in kounta d'eoc'h va histoar,

Hag an heol a velan dija tost d'an douar,

Koulsgoude em euz mall da gounta va buez

Vit meuleudi Doue hag enor ar Verc'hez.

Edon o veaji, n'euz ket ouspenn tri miz,

Hag o tremen Loudun, etal dor an Iliz,

Ha me o klevet trouz a dreuz ar mogeriou,

An diaoul a oa eno oc'h ober he ardou

Ervez ma lavaraz neuze d'in eur vaouez.

FRANCÈS

An diaoul e ti Doue !

KERIOLET

Ia, re vir eo, Francès !

Oll e c'houzoc'h e c'hell an diaoul beza lojet

Kerkoulz e korf eun den hag e korf al loened,

E korf an dud santel vel e korf ar re fall.

Mad, en Iliz eta, e Loudun e bro C'hall



An diaoul a re kalz freuz, ha zoken euz ar mez
M'her c'hleve o iudal, hag oll chass ar barrez
O c'harsal assamblez, sur oun ne raffent ket
Kement a doduon hag am euz-me klevet....
Setu me en Iliz.... Biskoaz var an douar
N'em boa klevet kement a drouz hag a safar !
Me velaz dirazon eur sœurez possetet,
En he c'horf, vel er gear, edo an drouk-spered.
Oh ! guelet a ran c'hoaz he bizaj distronket,
Eonen en he ginou, me vel he dent skrignet.
He bleo dispaket oll a nije var he fenn,
Var leuren an Iliz e ruille diskempen.
He daoulagad spountet a lioc'he vel goulou...
A veac'h em boa laket va zroad var an treujou
An diaoul a oa ennhî raktal n'euz va guelet,
Setu hen da iudal kalz muio'h eget jamez :
Ah ! Ah ! Keriolet, te eo, buhan er mez,
Da betra dont aman, te pec'her heb he bar ?
Ne 'z euz ket unan all ker goaz var an douar ;
Perag e chommes-te, aman vit va zelaou ?
Evit klevet marvad, histoar da bec'hejou !
Mad, selaou 'ta va breur.... Koumanz a ra neuze
Da laret kement tra oa kuzet em bue,
An traou louz ha mezuz, pep tra lavare d'in
Ha me he zelaoue var bennou va daoulin.
Ha goude pep torfet, hèn d'in a lavare :
« Breman e veler mad a just ez eo Doue !
An Elez a zo bet taolet da virviken
E tan flamm an ifern vit eur pec'het hebken ;
Malloz da gement so ! ha Doue a andur
Ac'hanoc'h-c'houi evêl eun tad he-grouadur. »
Goudeze lavaraz ez oa deut ar Verc'hez
D'am zenna deuz ar fank, d'ober d'in chench buez
En eur lavaret d'in ez oa va flas merket
E kreiz punz an ifern etouez ar re daonet ;
Ha ma tlien eun deiz en env beza salvet
Ez oa dre vadelez ar Verc'hez benniget.
Kementse oa aoualc'h vit ranna va c'halon.
Raktal digant Doue me a c'houlén pardon.
Vel Sant Per, va fatron, var lein menez Kalvar,
Me ouelaz va fec'hejou gank keuz ha gant glac'har !

Hag evel ma taoler an teil e meaz ar c'hraou,
E kalon eur beleg me daol va fec'hejou.
Hag adaleg breman hag epad ma vevin
E klaskin ober vad ar muia ma c'hellin.
C'houi c'hell hen lavaret d'an oll ha tro var dro,
Ar maner, ti va mam, hiviziken vezo
Ti ar re n'o deffe, er bed man, ti ebet,
Ti ar paour, ar re glanv, ti an dud mac'hagnet.
Digorit frank an or evit an oll boaniou,
D'ezho vezo va nerz, va goad, va oll vadou.
D'an oll dud afflijet e c'hellit lavaret
E kavint digemer e ti Keriolet ;
Ha marteze c'hellin gant va aluzennou
Paea justis Doue evit va fec'hejou !

MATHURIN (*O ouela*)

Gouela rankan, Aotrou, n'oun ket evit miret !
Ar maro, pa garo, a deuio d'am c'herc'het,
Rak breman ez oun sur, e c'hellin ho kuelet
Eta ho mam en Env, e kreiz an eurusted.

KERIOLET

Mathurin, hîrr eo c'hoaz an hent, ar c'haleta
A zo c'hoaz da ober. Pedit Doue eta
Vit ma roio d'in nerz da ren mad va buez.

YVON

Evidoc'h, vel gwechall, me a bedo bemdez,
Aotrou. Evidon-me c'houi a bedo ive,
Evit m'am bezo nerz da zougen va bue !

KERIOLET

Petra oc'h euz, Yvon, perag ez oc'h breman
Ken trist ? Ha beza 'z euz duze eun benag klanv ?

YVON

Tost da vloaz zo dija, ez eo goullo va zi !
Va greg, va merc'h, va mab ! e maint er bez ho zri !

KERIOLET

Petra c'heuz lavaret ?

MATHURIN

Allas ! ar virione !

He dud a zo maro !

KERIOLET

Va fillor Pier, ive ?

YVON

Ia, siouaz, Aotrou !

KERIOLET

Ah ! Yvon, ho kraouadur.

Vel eur boket lili, dirag Doue oa pur,
Fank ar bed n'en d'oa ket he ene labezet.
Doue, m'her goar breman, en deuz he gemeret
D'ar mare ma tlien, me va unan mervel,
Velse, el leac'h eun diaoul 'n euz kemeret eun el.
Ah ! breman me gompren perag an drouk-spered
A lare d'in penaoz eun all en d'oa paet
Da Zoue eul loden deuz dle va fec'hejou.

FRANCÈS

Ia, he vuez, vidoc'h, en euz roet, Aotrou.

YVON

Breman e lavaran meuleudi da Zoue,
Mad en euz great kemer va c'hraouadur ; ha me
Da c'hortoz ar maro, gant joa a labouro...

KERIOLET

Em c'hichen-me, em zi, Yvon, c'houi a vevo,
Gant Mathurin ha me, ha c'houi, Francès, ive.
Pevar e Kerlois ne vezint ket a re
Vit servij ar beorien a deui da glask bara
Aberz an Aotrou Doue, aberz Santez Anna.

YVON

Mad, chomm a rin ganeoc'h, distag eo va c'halon
Deuz pep tra.

KERIOLET

Ha c'houi, Francès ?

FRANCÈS

Me rai vel Yvon.

Rak kredi start a ran ne 'z euz netra ebet
Hag a dalfe kement hag eur vuez roet
Da ober vad d'an oll, hep goulén gobr ebet.

MATHURIN

Mad eo, va mignoned, ervez ma komprenan
C'hoant oc'h euz da ober eur gouent nevez aman

Dre ze digant Doue me c'houlen beva c'hoaz
Evit beza santel evel eur guir vanac'h.
Mes, Aotrou, c'houi zo skuiz, deomp breman d'ar-maner,
Varc'hoaz, da ober vad, ni or bezo amzer.

PEMPED PENNAD

KERIOLET, MATHURIN, FRANCÈS, YVON, IZAAK.

IZAAK

Aotrou, me a zo deut aberz an drouk spered
Vit digas d'eoc'h da zonz en amzer dremenet.

KERIOLET

Izaak !

IZAAK

Me va-unan.

FRANCÈS

Ar sorser milliget !

YVON

Va Doue, em c'halon birvi ra va goad
P'e ma muntre va mab, dirak va daoulagad.

IZAAK

Aotrou Keriolet, n'oc'h euz ket va c'hlevet ?

KERIOLET

Ma teuit aberz an diaoul, n'oc'h euz nemet tec'het.

IZAAK

Ah ! ah ! ar respont-se c'hortozen diganeoc'h !
Pell aoualc'h, koulsgoude 'm euz labouret vidoc'h.
Ha breman, pa 'z oun koz, pa 'z eo va c'horf torret
Livirit din mont kuit ha pell ouzoc'h tec'het !
Euz ho perz, den fallakr, kementse c'hortozen.

KERIOLET (*a gostez*)

Va Doue, ra c'hellin he zelaou penn-da-benn.

IZAAK

Me zo deut koulsgoude d'ho kaout hag heb krena,
N'eo ket evit goulén nag arc'hant na bara,

Mes evit lavaret d'eoc'h c'hoaz kenavezo,
Rak sur oun, heb dale, va heur a zigouezo
Da vont da gaout ar mestr 'm euz atao servichet.

KERIOLET

Izaak.

IZAAK

Peoc'h, me ho ped, rak me rank lavaret
Ar pez so em spered. El lanneg eun nosvez
An diaoul fellaz d'ezhan d'in-me en em ziskouez.
« Izaak, lavaraz hèn, guerzet ec'h euz d'in-me
Da vuez, da spered hag ive da ene;
En distro ec'h euz bet eur galloud heb he bar
D'ober ar burzudou brasa var an douar,
Galloud da barea tud kerkoulz ha loened
Dre vertuz eur ieoten d'hanter noz kutuillet;
Te anavez pep tra, n'euz ket guelloc'h profet,
Te a lenn en daouarn kerkoulz hag er stered.
Bremen ne c'houlennan diganez met eun dra,
Ro d'in Keriolet, hag e teui da veza
Mestr var an diaoulou » Labouret 'm euz abaoue
Evit plijout d'an diaoul ha gounit hoc'h ene.
Mes, dec'h da noz, siouaz, 'm euz lennet er stered
Ez oa va oll labour ha va oll boan kollet.
Hirio rankan plega, anzañ ran dirazoc'h,
Rak ar Verc'hez ive zo a du ganeoc'h.
Rak-se, digant an diaoul me em euz goulennet
Dont d'am c'herc'het aman, e ti Keriolet.

KERIOLET

Guelloc'h ve d'eoc'h goulen pardon digant Doue.

IZAAK

Ne 'z euz mui na truez, na pardon 'vidon-me.
Va ene pell a zo d'an diaoul a zo guerzet
Ha terri ar marc'had, breman na c'hellan ket.
Deuz eta, deuz Satan, va mestr ha va roue.
Deuz hirio da rei d'in ar priz euz va buez

(pellad a ra)

Ra vo dor an ifern dirazon digoret
Pa 'z eo guir eo serret dirak Keriolet.

(En em lara a ra)

C'HUEC'HVED PENNAD

KERIOLET

Va Doue, spountuz eo maro an den daonet
Mil bennoz d'eoc'h eta, o Guerc'hez benniget,
Rak c'houi, evel eur vam, a zo deut d'am zenna
Euz kreiz ar fallentez, an dizurch ar brasa.
Meuleudi d'eoc'h eta ha d'hoc'h hano zantel
Ra vezo e pep leac'h laret a vouez huel
Ar vadelez 'c'heuz bet evit Keriolet,
Vit ar pec'her brasa zo bet biskoaz er bed.
Guerc'hez trugarezuz, grit c'hoaz eul labour all,
Grit ma vezo ker mad ha ma 'z eo bet fall.

AR RE ALL

Grit ma vezo ker mad ha ma 'z eo bet fall.

MATHURIN

Biskoaz var an douar ne d'oun bet ken euruz.

KERIOLET

Deomp breman d'an Iliz da gana trugarez
D'an hini zo hannvet, dre oll, Mam a druez.

MATHURIN

Da c'houlen diganthi ma viot beleg eun deiz.

FRANCÈS

Bremen e kredan start ar pez ne greden ket,
Kredi ran guelloc'h e nerz ar chapelet,
E galloud ar Verc'hez hag en he c'harantez.
Kredi ran e klevin an oferen nevez.
Meuleudi da Zoue ha d'he Vam ar Verc'hez.

TAOLEN DIVEZA

(An aotrou Keriolet a ia da lavaret he oferen genta)

Meulomp Doue, va mignonet
Gant an Aotrou Keriolet,
Ar bleiz kriz zo deut da veza
Eun oanig dous, an tenerra.

An drouk 'n euz great dre bec hejou
A bae dre forz aluzennou,
Bremañ ez eo tad ar beorien
Hag hor skuer dre he binijen.

Braz eo bet he fallagriez,
Brasoc'h vezo he zantelezh,
Rak gras Doue ker gallouduz
Gant fank a ra mein prisiuz.

Hirio, e kreiz al levenez
E kano he ofern nevez ;
Ha ni gano beteg an noz
Gloar da Zoue er Baradoz.

